

7

Ali ar Roue Salomon

— 30 —

Selaouet gant spont hag eston
Ali ar Roue Salomon
Gravet hen don en ho spered
Ha biken pec'hed na refet.

Ret eo mervel, hag en instant
Komparissa er jujamant
Deut eo an arret hep appel
D'ar gloar pe d'an tan eternel.

Ar pezh zo kaoz ma ren er bed
En touez pep sort tud ar pec'hed
Eo a boan e kefer unan
A zonzjer finio divezan.

Rag ar c'horf hervez an natur
Ne glask nemet he blijadur
Ha koulskoude en ber, hep mar
Ez ai da vreina en douar.

Ar c'horf a zo en pep fesson
Ken dilikat ha ken minion
Mes goude bea re vaget
E vo ive boed d'ar pruned.

Ar bed ma a zo ken treitour
Evel eur bluen var an dour
An nep en em fizio ennan
A vezo zur tromplet ganthan.

Prometi a ra hir vue
D'ar re a zo var bord ho be
D'ar re iac'h ne glanvfont ket
D'ar re glanv e promet iec'hed.

Ne laket ket ho kalonnou
Er bed ma da zastum madou
Madou ha pa vent dastumet
N'en d'int netra nemert moged.

Rag goude kement fatig
Evit n'em renta pinvidik
Petra po evit ho poan
Po sortifet euz ar bed man ?

Eur c'hos insel, pevar flanken
Eun dorchon plous dindan ho pen
Seta eno ho heritach
Ha n'ho po ken evit partaj.

Na liziet ken en ho iec'hed
N'ho iaouankis, en ho kenet
Ar maro zo kren hag a ziskar
Ar re nerzuza d'an douar.

N'hen deuz na madou na noblans
Genet na braster na bombans
Disent euz lezen ar maro
Ho falc'het a raio pa garo.



Chanson an Efer Gouin

TON : *Santez Anna*

1

Me o suppli kristenien, en hano Jesus-Christ,
Komprènit va hanouen, rag meurbet eo trist,
Va zujet eo ar boesson, an alcool milliguet,
Glahar an dud a fesson, rouin ar Vretonet.

2

Setu aman va histoar, eun exempl goal spontus,
Eun tad, eur mab hag e hoar, bete neuze evrus,
Bewa rin mad asamblez, gras d'ho sobriete,
Mes an diaoul a zeues da droubla an tri-ze.

3

Eur zulves, ar potr yaouank a rankontr eun otro,
Bonjour, emezan, pod koant, me o klask a bel-ze
Me meüs teir gondision da rei deoh-hui da choas
Hag en aour eur milion, choazit o havantaj.

4

Petra, me pot yaouank, a houffet evit ze
An otro, gant aer gontant, a guinigas neuze,
Mar keres laza da dad, pe skei e war da c'hoar
Pe efa gouin, a gouin mad, te vo pinvik dispar.

5

O pebeus goul direson, laza va zadik kez
Pe skei va hoar guez mignon, m'en tou ne rin james
Me efo gouin dre voder evit kaout ho harhant,
Hag an diaoul ken zeder, a lar me zo kontant.

6

Ar pod yaouank a redas d'ar guer de direten,
Hag evel ma tigoras, wa leun a aour melen,
Kargan 'ress he hodellou evit prenan ar gouin,
Hag e tremp e vuzellou, ze dennas da wal fin.

7

Breman en osteleri e kaf e blijadur,
Er harto, en odivi, hag er visso impur,
An tad, gant tristedigues, a lavares d'he vab :
Va buguel, laka ewes, da gundu neo ket mad.

8

Ar mab, 'vit ar vej kentan, na respontas netra,
Mes kounner a wa ennan, ma retorn da efa,
A pa zistroas dar guer, muioc'h meo adare,
Divergont 'vel Lussifer e vallozi Doue.

9

Pa hantre en ty e dad, e dad gant eur voues dous
An delo 'ne zaou lagad, va mab, ra ket a drous,
Efet e peus adare, pebeus glahar eo ze,
Kol da gorf a da ine, sonj en Otro Doue

10

Neuze ar mab en kounner euz rebecho ken mad,
A sko e dad ken pouner, ma lazas mik e dad.
A da rebecho e hoar, e sko e hoarik paour,
Setu aze an histoar euz ar gouin hag an aour.

11

Pa heo divewet ar mab, e galon zo mantred,
Pa ouel neus lazet e dad hag e hoar gues skoet.
Kemeret eo prisonier dre aret ar justis,
A kondavnet ar mevier dar marwer hourdassis.

12

Laket eo er selulen da hortos ar maro,
Zonjit ennan, kristenien, penos e skuill delo,
Kollet eo e korf hag ine, allas dre fot ar gouin,
Hag e ben a vo trohet dindan ar vouillotin.

13

Brema tadou ha mamou, pere sav bugale,
Disket dei ho fedennou, reit d'hei komzou Doue,
Grit d'hei lenn an Aviel, guir denzor ar furnez,
Ha guillotin Breiz-Izel na grenno den james.

14

Ar gwin hag ar gwin-ardant a goust arc'hant hag aour,
Hag e rent an den mechant hag ar familiou paour,
Eun den meo a zo noazuz d'he vreg d'he vugale,
Hag eun den goal danjirus atao e pep contre.

15

Evit kaout grasso Doue prenit eun Aviel,
Gant va Almanak newe noufac'h ket ober wel,
Ha da vloa nep a vevo em c'hilasko zur are,
Rag Doue o penigo c'houi hag ho pugale.

F. Le Quéré.

Favoriser l'ivrognerie pour en tirer un profit commercial, c'est certainement le mode le plus criminel d'Assassinat avec Vol qui ait été pratiqué.

RUSKIN.



Ar Skritur Zantel

TON : Maman, Maman Chérie

Taostet, taostet kristenien
Da breña levr Doue :
Al levr muia ansien
Hag ar c'haera ive.
Skridou an holl Brofeded
Ha re an Ebestel,
Gwella levr a ve kavet
Er bed universel.

Hema, breñan, kristenien
Eazet d'an holl da gompren
Hep beza gwal savant
Memeuz ar vugaligou
Vel ma lavar Jesus,
A gompren mad he gomzou
Hag int misteriu.

Tadou, Mamou, Kristenien
Prenet d'ho pugale
Levr kaer an doktrin gristen
Da lenn deoc'h n'ho tiez
Ha Doue ho pennigo.
Hervez he vadelez
C'hui hag ho pugaligo
En kear ha var ar meaz.

C'hui holl, taostet tud iaouank
Prenet d'ho mignoned
Eul levr kaer d'ober presant
Euz ma re alaouret
Rag prisusoc'h kado
Na refet birviken
Evit rei un ho levrio
D'ho mignoned da len.

En pad ma ve iac'h an den,
Ne sonj ket er maro
Mes pa ve klanv en em jen
Gant aoun euz an anko.
Ar boan gorf, ar boan spered
Ar re ze zo spontuz
Mes el levr-ma e kefet
Remet dei gant Jesus.

Er vro-ma zo tud kruel
Hag a larfe deoc'h e'ha
Teurel ho levrou santel
En tã braz da zevi
Mes diskouez deoc'h el levr-ma
Ne helfont birviken
Eur gir fall an distera
Me barife va fenn:

Ar zent, henvel ouzomp-ni,
Pa oant war ar bed-ma
Koulz hag ar Werc'hez Vari
A lenne el levr-ma :
Ha Jesus hen deuz laret
« Furchit ar skrituriou »
Groet-ze eta Bretouned
Ha prenet va levrou.

F. LE QUÉRE.

